



INTAON AL LOCHENN.

Er bed-mân nak aour nak arc'hant
 N'ho deus biskoas staghet va e'halon ;
 N'hont nemert eur c'hës païsant ;
 Hevrus he voann em c'hondition ;
 Mais va fried karantezus
 Hirio a gollân , pebës ankenn !
 Goëlet a n'hôn ket malheyrus ?
 C'huëc'h krouadur am eus em lochenn.

D'ar c'houlz ma voa beo va friët ,
 He furnès a charme va e'halon ;
 Va bugale eus va c'haret ,
 A roë din konsolation ;
 Bep eil oll he pokenn deze ,
 Un tad hevrussoc'h na vo bikenn ,
 Dre ho jestou tenèr bemdè
 He voann hevrus ebars em lochenn.

Da vintin , pa zan d'am parkou
 Adare da gomman's va deve's ,
 He lesan va bugaligou
 Eus va zi da ghemerad evès ,
 Ha da noz , pa deuân en dro ,
 Evit va distrei eus va ankenn
 En em stardont oll var va zro ,
 D'am c'honsoli ebars em lochenn.

Bras voa va laouënidighès
 Pa vijenn er ghèr gant va zlad ,
 Bremân pa velan va merc'h kës
 An dour a deu var va daoulagad ;
 Seblantout a rà din bepret
 Goëlet he mam dener em c'hichen ,
 En despet d'ham c'heus diremet
 Hon c'hoas hevrus ebars em lochenn.

O ma c'halfenn eb kaout miser
 Sevel ha deski va bugale !
 Me a halfè gant ann amser
 Fortunia va merc'hik martese ;

Neuse va fautret a veo bras ,
 Barrek da labourad un dachenn ,
 Em chozni mèn a hallo c'hoas
 Beza hevrus ebars em lochenn.

Hevrus meurbed me n'em gavo
 P'ho goëlin ho c'hounit ho bara ,
 Neuze pa deüo ar maro
 Eus ar vuez-mân d'am dilivra ,
 Va minnionet am enterro
 Gant va fried pe en e, c'hichenn ,
 A va bugale a ranno
 Va zam tieghès a va lochenn.

KOLLADENN HE VAM,

PE MOUMOUN HE VAM.

Un autrou bras démeus a Frans ,
 Den a vadou , den a noblans ,
 En devo eur mab eus ar guëlla ,
 Penner iaouank c'huëc'h pe seiz vloa ;
 Pautrik beo bras ha corf grêt mad ,
 Lem a speret hak a lagad ,
 Chautou poudek , eb krina tam ,
 Evel ar ros , rus , guenn ha flam.
 Karantezus ha paut seder ,
 Skeldr a vouës a mestr kauséer.
 Gant neubetoc'h a siou mad
 Eur mab a charmjè mam a tad.
 Evel-se ivez he voa karet
 Ar mab iaouank hak admiret.
 Nak a beurs tad nak a beurs mam
 Eus a netra n'enn dije blam ,
 Leset he voa da heuill he benn
 Evel ma vez eur golladen.

Un deiz couscoude ec'h arruas
 Tra na voa arruët biskoas ,
 Ma rankas an tad kontrolia
 He vab , hak hen humilia.